


O SANT FIANK



Diskan O Sant Fiank, en ho chapel Ni za da c'houlen ho skoazel
 Pe - dit 'vi - domb er ba - ra - doz Ha skuillit war - nomb ho penoz.
 I - A - man gant tu - chen - til hor bro En eur lec'h di-drouz ha ku - zet
 Kae - ran i - liz zo tro - war-dro Gwé-chall 'vi - doc'h zo bet sa-vet.

II - Ha breman, pep bloaz, euz a bell,
 An dud a zired niverus
 Da welet kaer dor ho chapel
 Hag en-ni an traou dudius.

III - Mes hirio, ho pobl kristen
 Ha fell dehi nemet pedi,
 Daoulinet dirak ho skeuden,
 Evit ar vro hag eviti.

IV - Ni a oar ho kalloud hempar
 Etal hor Salver beniget
 Rak epad oac'h war an douar
 'vit en servija peus bêvet.

V - Kuzet é donder ar c'hoajou
 Evit pedi gwelloc'h Doué,
 Pell doc'h an holi plijaduriou
 Ho peus trémenet ho puhé.

VI - E kreiz labour ha penijen
 Bepred glan ha madelezes,
 Noz, deiz, é tribun ho peden
 Bevet ho peus paour hag eurus.

VII - Koulskoudé pa zé d'ho kuellet
 Galvet gant brud ho santeloh
 Ar baourien hag an dud poaniet
 C'houi o c'hleve gant madelez.

VIII - Karantezus evit an holl
 D'ar c'hlanvour c'houi ré ar yec'hed;
 Hag ar bec'herien ie da gell
 Etal doc'h ouele o fec'hed.

IX - O pegen kaer ar gurunen
 Laket war ho tal gant Doué,
 Pa zigouéas eur tremen
 Pa nijas d'an nenv ho éné.

X - Euz lein en nenv, sellit ouzomp
 Diridet aman d'ho pedi
 'vit ho énoré é kanomb :
 Ra blijo doc'h hon meuleudi.